

HISTOR AR BRÉZEL

I

Me gred compagnunez vo troublet o memor
O touet da glevet récita an histor
Composet var sujet ar Roue infernal
Kenta deis o vis eost oa roet ar signal

II

Baoue ma e krouet an eol er firmamant
Neus ket bet didanan eur bresel ker sanglant
Na kement a vizer a zesolation
Glac'har tristedigues melconi ran galon

III

Lakomp on douapn oll var hor c'houstiane
Jhag amsavomp gant guir etresomp pobl a Franç
Penaos ne oa nikun ac'hanomp Francisien
A songe oa er vro kement a dreitourien

IV

Impossubl eo da zen kredir asistantet
Compren a diskleria an domach a so gret
En Nord demeud ar Franç a bro gaer ar Belgik
Zo kasi distruget gant tyrantel Laouik

V

O bresel antenuis a karguel a ganvou
O bresel glac'harus a karguel a zaelon
O bresel hirvondus ra viot condaonnnet
Tolet maez er broyou ar re deus-hi lakaet

VI

Guillou barbar ar Prus kruel hag obstinet
Empereur a chef bras Roue an appachet
So deut bars ar vro man gant eun arme pouner
O Songal kemeret garis e ber amzer

VII

Maes pa glevas Laouik klan gant ar jalousi
E oa deut gant ar Franç Brozaos hag ar Russi
E commandas neux eb coll amser buan
Da vombardi partout gant bombou n'aeroplan

Guillou II a erru a lavar de vab Comprinç

VIII

Arça va mab Comprinç breman e zomp rentet
E frontierou Belgik hor boa c'hoant da zonet
Continuomp an hent eb ober contenanc
Dre aman e rantromp antreal bars e Franç

IX

A mar fel da Belgik donet d'en em lakat
Da ampech ac'hanomp ni livro de combat
Machomp draillomp lazomp a laheomp an tan
Dre laec'h ma tremenfomp eb exepti unan

X

Courach va zoudardet en em sicouromp oll
Arabat eo lezel an amzer ken da goll
Pa neus commancet mad eo ret coétinu
Da lakat ar Belgik e tan ag e gouli

XI

Demp breman éa lakat ar siéç var Bruxel
Vav Malin hag Anvers er bo eb dale pll
A neuze dar Serhi ive dan Angleter
Goude lahat ar Franç en eur stad a viser

XII

Hag ar Russi ive laket e tan e goad
Tro var dro bombardet tout dar c'haeriu a blad
Evlse me a vo Roue burs an Europ
Pa vezo distruget bras a bian ar bopl
Roue Belgik a antre hag a lavar

XIII

Me lar deoc'h Francisien ha d'ho compagnunez
Darn Demeus va anui ha va tristedignes
Roue an Allemagn gant nombr a varbaret
En deveus ar vro man en antier revinet

XIV

No deus compassion dre lavc'h ma tremenont
Na danont na lazont an dud fal divergont
Bars ein Rouanteles a guement ker am boa
Ne zeus chomet onte netra da sistruja

XV

A c'hoas e lavaront herves a meus' klevet
E rankont exerci partout ho c'hrueldet
Me garffe o srec'hel an dud fal didalveo
Pa dlefe coustont din kemense va bues

Ar Francisien a erru hag a lavar

XVI

Roue nobl a vaillant appetit ho kanvou
Ni raye dar Boc'het dispen sur o rondon
Moyenan graç Doue hor c'hrouer beniguet
Ni sistrujo Laouik hage oll varbaret

XVII

Francisien generus courachus hag hardi
 C'hui Saozonet vaillant demp oll da gombati
 A partiomp buan d'attaki ar mouatrou
 A laka ar ravarch partout dre ar c'hueriou

XVIII

O pebeus trahison sanglant hag inhumen
 Preparet er gnmbat kenta dar Francisien
 Kasset oant gant percin d'ar frontier disarm cloz
 Faç da nao c'hant mil den armet deus ho gortoz

XIX

Allas evit enno ar Franç ca revinet
 Collet ganti siouas e guela soudaret
 Kasset d'an Allemagu evel prisoniertien
 Tretet vel esclavet e bro n'adyer'sourien

XX

Treitourien milltguet tud kruel o barbar
 C'hui heus laket ar Franç e koan hag e glac'har
 Cetu an tyrantet Digouet e sant Mihiel
 Dre laec'h ma tremenont an dred kri a cruel

XXI

E lakeont e tan agoad antiëraman
 Biskas ne oa guelet eun affer ker sanglan
 Eve' o deveus groet an dud fall ar monstrou
 Diskaret ar c'haeriou a devet illizou

XXII

Ar guer gaer eus a Reims bombardet nos a de
 Massakret merzeriet an dud eus ar c'hontre
 Demp oll ta mignonet Russi Brozaos, fidel
 Gant courach combatomp n'adversourien mortel

XXIII

Eh kaout compassion e vassakront allas
 An oll bars e Belgik e Franç bian a bras
 Roue ar Bayanet ar Prussianet vil
 Ara deomp eur bresel kriminel a civil

XXIV

Gont a rit couls a me int oll gaspillerien
 Bourevien d'ar Belgik dar Franç torfetourien
 Soisson a sant Die Charleroi zo e tan
 Maubeuge Lill hag Arras bombardet eb hean

XXV

Seulvue e vint souffert ea chom ebars ar vro
 Seulvui a valeurion a raffent tro var tro
 Ret eo ober moyen d'ober d'he sortial
 Ermaes deus n soulou livra dezo bataill

XXVI

Klevet o peus parlan deus combat vras ar Marn
 Enno oa bet trec'het Bleizi an Allemagn
 Hag ar C'homprinç trubard da vonet var ho c'his
 Contragn d'abandoni Breiz-Izel a Paris

XXVII

Dalc'homp ferm Francisien combatomp gan courach
 Ous hon enimiet karguet a dreitourach
 Ra bligw gant Doue donet da gonservi
 Ar Franç hag ar Beigik Bro Zaos hag ar Russi

XXVIII

Bezomp tud a galon betek r'fin soudadet
 A pedomp oll Jeann d'Arc ar vera'hes beniguet
 Demp hardi d'an assot mignonet ker breman
 Evit ma vezo fin deus ar ganaillez man

XXIX

Partiomp assambles a demp incontinant
 Thoguen lakomp eves deus ar C'homprisç mechant
 Rak mar dolo petrol varnomp tan artific
 Leun eo a gasonni ha karguet a valiç

XXX

Tremenomp ar goardou et lavaret netra
 A pa vimp en o c'hreis comamçomp d'ho laza
 Hardi ha courachus gant hor c'hlezeier guen
 Enfilomp aneso tout hon adverssurien

XXXI

Bretonet courachus soudaret breiz-izel
 Martolodet vaillant o vont d'an dardanel
 Rak-se bezomp soignues da evesat an oll
 Minou a so laket er mor raffe deomp coll

XXXII

Souden ar c'hanoillou a gomanças yudal
 Poriou an Dardanel a gomanças strak'ah
 Evit an taol kenta hennes a va et mad
 Mar kendalc'homp e vo ar Bosphor prest a blad

XXXIII

Sultan Constantinopl a deuas da grenna
 Klevej ar c'hanoiljou var ar mor Marmara
 Allas breman me vel penaos e Zon tromplet
 O kredl da Laouik chef an dud deguisit

XXXIV

Mar gallomp dont aben da lakat ar siech
 Var dro constantinopl hag ive da ampech
 An Turket an Aotrich d'en em rassia
 Ma varfint gant famin pe dont d'en eum renta

XXXV

Ne ellan ket mirel da zonet d'ho tamal
Den impi obstinet o Roue dtsleal
Oc'h obtinatien o maliç o vengeance
A zo kaos eus maro pet den euz Franç

XXXVI

Ar c'homprinç a Laouik a dle beza krouguet
En eur plaç ma ello an oll dud o guelet
A ma ello neuze oll habitantet Franç
Lavaret o deveus ar grouk vit recompanç

XXXVII

Antecrist milliquet den infam o den kri
An ëon hagen douar a zeni d'ho condaonni
Roue ar gloutonet kerz a kig hog eskern
Gant an oll diaoullou da vouelet an infern

XXXVIII

Roue an tirantet sorcer bras ar muntrer
Te poa songet beza er bed oll gouarnet
Harça ta mignonet eb dale davantach
Ni rai dar forbanet lakat libr ar passach

XXXIX

Pa'vezin er frontier e harzou un turki
Ecreis tan ar mitrail dirak an enemi
Neuze eo e tuuyo ar muia da song din
Er guer va bugale a va fried divin

XL

M'ho ped d'hor preservi Guerc'hes Sacr hon Itron
Var dachen ar gombat a deus an trahison
Arça ta va breur paour laromp adieu d'hon tad
Hag ive d'hor mam gues arok dont d'ho c'huitad

XLI

Adieu va bugale kenavo ar return
Kenavo va fried n'eur bokat d'ho taou zorn
Kenavo marteze vit ar vech diveza
An disparti zo trist ret eo din partia

XLII

Adieu va Breiz-Isel va bro muia karet
Kenavo va chereant a deoc'h oll mignonet
Doue da rei deomp graç den em velet en ein
Ma n'hor bo ar bonheur da sistroi e bue

XLIII

O Doue souveren m'ho ped va c'honsolet
Mervel aran gant poan hag impatientet
En defot ne meus ket kelou deus ma ma ker
Partiel an deveus kenta demeus ar guer

XLIII

O planeden galet tristes eo an disparti
Me a yello gueneoc'h va fried m'ho supli
Doue a va Ael mad vo eus va c'hondui
Chomit er guer pedit a na ouelit ket din

XLV

Nouzon ket evit guir penaos von disparti
Maez ma na sistroan humblamant m'hosupli
Da laret eur beden va fried eb dale
Hager memes amser repozo va ene

XLVI

Entetet mignonet c'hui ive va oll dud
Me gred vit ar vech man eo et betek ar but
Er Balkan var ar mor Baltik vo eehuet
Ar Brezel hirvoud man so pel zo commencet

XLVII

O jésus va Aoutrou va Doue Souveren
Roet deomp an avantach var hon adversourien
Evit ma vo gant joa eheb contre kriet
Cloar hag enor dar Franç cetu dillivret

XLVIII

Ra vevo aa Belgik rentomp gloar d'ar Russi
Rentomp gloar da vro zaos hagive d'ar Serbie
Neuse d'an Itali a so en em laket
E poan evedomp-ni enep ar forbanet

XLIX

Anfin compagnenez me ia da finissa
Gan glahar o sonjal bars ar brezel trist ma
Doue oll galoudus a bedan a galon
Da sculla var ar Franç e venedictian

L

Neb a deuz composet an histor peu da ben
Zo ganet a maguet e canton Rosporden
Fanch a Rest ehano ag a zo cantonier
Ar vicher a zo mad mez baïamanzo ber

Tourc'h le 6 Janvier 1916

F. LE RESTE